

Gwerz Mari ar Charlez

Dastumet gant Kervarker, e 1840

Etre Karaez ha Montroulez
Mañ ar plac'h koant Mari ar Charlez
Gant un tokig kastor war he fenn
Hag ur c'hleze dir en he barlenn
Hag he daou gi-red en he c'hichen
Unan a zo du, an all zo gwenn
Markiz ar Rivier a lavare
Da Vari 'r Charlez an deiz a oe
« Eurvad deoc'h-hu, Mari ar Charlez ;
C'hwi vo ma c'homer e Montroulez ?
— Ha penaos a yefen-me ganec'h
Ha bout an archerien war ma lerc'h ?
— Me ho lakaio war ma barlenn
M'ho tifenno ouzh an archerien. »
Markiz ar Rivier a lavare
E Karaez ha pan arrue :
« Ha yec'hed ha joa 'barzh ar ger-mañ
Pelec'h 'mañ an ostaliri vrasañ ?
Pelec'h emañ an ostaliri vrasañ,
Ha ma yen enni da leinañ
Ha ma yen-me da leinañ enni
Mari ar Charlez a zo ganin
Ganin ar plac'h koant Mari 'r Charlez
Zo 'vont da gomer da Vontroulez. »
Mari ar Charlez p'he deus klevet
Da varkiz ar Rivier 'deus laret :

« Markiz, markiz, m'am bije gouiet,
Birviken tamm n'am bije debret.
Me nije lakaet da wad ker yen
Vel ma je an houarn pe ar vein
Me am eus div c'hoar 'barzh ar ger-mañ
Prijent ket pleg' o fenn da ouelañ
Prijent ket pleg' o fenn da ouelañ
'Vit gwelet krougañ o c'hoar henañ.
A dra sur ma karje ma lezvamm
Bout roet din ma boued, deus ma
ezhomm
Me na vije ket sur bet kavet
Tri deiz korn ar parkig balanek
Tri deiz korn ar parkig balanek
Hep debriñ nag evañ mann ebed !
Etre Karaez ha Montroulez
Ez eus ur bod koad karget a zrez
Liesoc'h a benn marv a zo ennañ
Evit na neus er garnel er ger-mañ ;
Ha me meus sikouret o lazhañ. »
Mari ar Charlez a lavare
E barr an uhelañ, pa bigne :
« Me ne rafen forzh demeus mervel
Mar mije un darn deus ma goulenn.
Me garfe kavet kalon ma zad
Etre an douar ha plant ma zroad ! »